

87

1894

# ISTOR AR C'HAD

## TON AN NOUËL

---

### 1<sup>er</sup> Couplet

Selaouit cana me o ped,  
Eur chanson névés composet,  
So gréat divarben eun affer,  
A so erruet e bourg Cleder.

### 2<sup>e</sup> Couplet

Sèvel a ra ar bléo em penn  
E conta deoc'h an abaden,  
Man oc'h eus poan oc'h va c'hrédi,  
Testou a meus, meur a hini.

### 3<sup>e</sup> Couplet

Dissul da fin ar gouzperou,  
Eo c'hoarvezet an trubuilliou,  
Clédéris oll so bet spountet,  
Piou en o plaç na vijé qued.

### 4<sup>e</sup> Couplet

Eur picol gad, mes eur c'had fin,  
A déché araoc chass an Toutin,  
Gant aoun da veza tizet,  
Dréist ar vogueur eo bet lamet.

### 5<sup>e</sup> Couplet

Prest e liors ar presbital,  
So dilamet ar penn chatal,  
Me lavar neo quiet sod ar c'had,  
Pa sa er jardin da gusat.

6<sup>e</sup> Couplet

Eno ar c'had a lavare,  
E maoun ama e savete,  
Biquen chass an aoutrou Toutin,  
Ne gredint lamet er jardin.

7<sup>e</sup> Couplet

Hoguen hirio siouas e Franç.  
Ar chass a so digoustianç,  
Gant o mistri o deus desquet,  
Beza discorpul, divezet.

8<sup>e</sup> Couplet

Chass an Toutin so divezet,  
An or dezo so digoret,  
Ac en eun istant Farino,  
Oud ar c'had en deus gréat e zro.

9<sup>e</sup> Couplet

O clevet ar chass o c'harsal,  
E tiret tud ar presbital,  
Souezet bras en eur gavot.  
Chass a piquerrien pa velont.

10<sup>e</sup> Couplet

Rebech a reont dar piquerrien,  
E zeont a enep a lezen.  
A lezennou a sifen mad,  
Var dra reali chasseal ar c'had.

11<sup>e</sup> Couplet

Emichans an aoutrou Toutin,  
A sonch dezar e soump routin,  
Ar c'had ganeomp-ni a chomo,  
Peotramant ni a velo.

*12<sup>e</sup> Couplet*

Etretant an aoutrou Tontin,  
A seu e unan er jardin,  
An oll a gomans da grenan,  
Gant aoun de velet o facha.

*13<sup>e</sup> Couplet*

Hoguen pell diout en em facha,  
Elavar quen tranquil a tra,  
An drouc so great a vo paët,  
A var guement-ma chican ebet.

*14<sup>e</sup> Couplet*

Ne garan quiet ar facheri,  
Ar procezou a laëronci,  
Aoutrou person dalc'hit ar c'had,  
Me c'hinnig deoc'h a galon vad.

*15<sup>e</sup> Couplet*

An aoutrou person pa er c'hlevas,  
Dezan ractal a respountas,  
Ar c'had laset bars em jardin,  
Dre vir so din. aoutrou Toutin.

*16<sup>e</sup> Couplet*

Ma senten oud hiniennou,  
Me c'helfe deoc'h ober misou,  
Mes ne garan quiet procesi,  
Surtout evit torfet eur c'hi.

*17<sup>e</sup> Couplet*

Me garfe rei deoc'h cusul,  
Choum eb mont da chasseal da sul,  
An dra ma noa quiet erruet,  
Aoutrou, er guêar ma vichad choumet.

*18<sup>e</sup> Couplet*

Evellen pa soc'h quer poli,  
Ne garfen quiet o refusi,  
Mes ar c'had c'houi a prisacho,  
Hac en o tesir me o paëo.

*19<sup>e</sup> Couplet*

Ne versan qued, aoutrou person,  
Va lapinet na va guidon,  
Va guidon a va lapinet,  
A ves roet tout, d'am mignonet.

*20<sup>e</sup> Couplet*

A mes pa fell din caout quic gad,  
A gustum atao paëa mad,  
Presanchou ne guémeran quiet,  
Nemet digant va mignonet,

*21<sup>e</sup> Couplet*

Ne meus netra da lavaret,  
Peb den en deus e vignounet.  
Ar c'had ganen me a yëlo.  
Oc'h arc'hant ganeoc'h a chomo.

*22<sup>e</sup> Couplet*

Bolontez vad a hep costes.  
A vir oud chican a procès.  
An Toutin a person Cléder,  
A servicho deom-ni da scouer.

*23<sup>e</sup> Couplet*

Brema tostait a klevit mad,  
Piou enn devez debret ar c'had ;  
Hennes a zo ann Aoutrou Raoul.  
Eur c'hender goumpez d'ann diaoul.

**IAN NEMO**

---

MOULET E BREST, E TY. E. JOURAND